
PROVERBOU SPAGNOL,

Troet e Verzhou Brezonnec gant M.^{me}

1. **N**A lavar guer da greg na pic,
Ma ne fell dit e ve public.
2. **M**el, fortun ha penn maouez
So c'hoant da cheinch alies :
Ar penn maouez a cheinch pa gar
Allies evit al loar.
3. **E**ret train fall e vez un ty
Pa vez g'hoant o c'hoant mandy.
4. **B**iscoa memes n'voe goelet
Greg na m'hoant hep a er bet.
5. **U**n ty carguet a vinoret,
N'en deus mignon na car er bet.
6. **D**en oc'h maouez he ell miret,
Na rañ e c'hoant Doue'r ermet.
7. **U**n nosvez vat ha gon devez
En deus amoureux pa zemez.
8. **G**ra fortun da vap pa guiri,
Ha demez da verc'h pa elli.
9. **I**ntanvez mat he deus madou,
A oar musura he dalfou,
Gant ul lagad e voñelo druz,
Ha gant un all e c'hoarz e cuz.
10. **D**aou bot oc'h tan so sin a fest,
Diou greg en ty sin a tempest.

11. Voar hed ul leo ne dosta quet
Oc'h ur bleo rus na greg barvec.

12. Un den a stot var e cuzou,
Ne de quet fait ar merc'hejou.

13. Cals bugalez hep larguentes
A laca espern an danvez.

14. Pa renq ozac'h senti oc'h greg,
E za tieguez da redec,
Hac er gueler a ra parfin
Oc'h ont d'ar galoup de ruïn.

15. Mat e perenn ma na ra trous,
Ha greg so mat ma na gourdrouz.

16. Guell eo groac'h coz alaouret
Evit plac'h coant gant bleo friset.

17. Mevel a ra goal cher d'e lein,
Pa lein e vestr gant ur pouncin.

18. Goude tri dez e squis peb den
Gant glao, gant greg ha gant estren.

19. Urz vat en ty ha tiecat
A lam a boan peb ozac'h mat.

20. Guell e disqui mabic bihan
Evit destum madou dezan.

21. Guell eo chom hep beza ganet;
Evit chom hep beza disquet.

22. Fouetta buguel hac e zisqui
Mar de mechant, er guellaï.

23. Na zisque quet re a zouçder
Da graouadur na servicher.

24. Aliez e ret chench a vara,
James ne ret chench a esya.

25. Coz domestiq en un ty mat,
Ne gustum quet servicha mat.

26. Matez ebet na zalc'h e ty
Mar e deus ur mignon gaty.

27. Ret e da cundu tinell caër
Beza pinvidic bras pe laër.

28. Evit prena guin a pastel
E ret caout arc'hant er godel.

29. Nep a zispign dre ma c'honez
James ezom yalc'h nen devez.

30. Ur marc'hadour o trafica
Ne sant quet an dispign a ra.

31. Enor, profit, contantamant,
En deus nep a labour strivant.

32. Nep a labour hac a trafic
A verit beza pinvidic.

33. Den yaouanc o feneanti
A zestum poan voar benn cozni.

34. Nep so paour mar en deus c'hoant
Da c'hout petra dal an arc'hant,

Clasquet e prest hac e voüezo
Couls ha den petra dalvezo.

35. Guel eo hep dle bara heiz
Evit e prest bara guinis.

36. Na amprest james mar guellez,
Guell e dit espern paourentez.

37. Nep so re vignon d'ar guin mat
So adversour da vap e dat.

38. Abars mervel ret e zanvez,
A dost an den oc'h paourentez.

39. Gra vat d'an dut pa zi ebiou,
 Ha na sell quet pe da biou;
 James da goll ne d'ar mat gret,
 Ur veich bennac e vez rentet.

40. Malheur d'an den a ancoüa
 Ar mat a vez gret evinta.

41. Quenderf compez vi pa bresti,
 Map ar butenn pa c'houlenni.

42. Alies den pa brest da zen
 A goll e arc'hant hac e zen.

43. Ret dan den n'en deus netra
 Laboura tenn, non pas gouela.

44. Cals a vignonet so contant
 Rei ho foan non pas o arc'hant.

45. Un amezec mar e so guell
 Evit na de querent a bell.

46. Mignon oc'h taol cals a bromet,
 Mæs et ermes, n'oc'h ene quet.

47. C'hoarz d'an hini a so quen dall
 D'en-em fiziout e traou re all.

48. Na les da lot etonez lot den,
 Pe en so mignon, car pe estren

49. Bete'r yalc'h e za mignonaich,
 Ne ra quet ur paz davantaich.

50. Secret da dri nep a lavar
 Abars ur mis un all er goar.

51. Nep ne nac'ho quet e secret,
 Secret re all ne guzo quet.

52. Plac'h a gar e henor miret
 Na dle frequanti re ar goaset.

53. Nep a bromet a zestum dle,
Nep a so cred ra ivez.
54. An amser gaër hac ar cher vat
A ra disprijout mam ha tat.
55. Prena queuneut so divezat
Pa ze ret c'hueza er biziât.
56. Na verz netra da vignon dit,
Ha na bren digat pinvidic.
57. Pren en foar ha guerz en da dy,
Ha madou prest a zestumy.
58. James cont vat ne gafer gret
Etre car na carez er bet:
Darn so contant eus o lodeun,
Ha darn all a fell dezo dispenn.
59. En eol goüan, nac e map caër,
Na fiz james muguet e laër.
60. Nep oc'h glao na vir e dy,
A denn mizou d'e reperi.
61. Ne rer james gant dilijanç
Ar pez a baeur en avanç.
62. Micherourien ma n'o gueler
A rei d'ar mestr o faea quer.
63. Dispign a rear o vont en hent,
Mæs o terc'hel ty daou c'hement.
64. Ret e souffr poan da gaout squiant,
Ha labourat da gaout arc'hant.
65. Mar servichez tut puissant,
E vouezy prest petra e tourmant.
66. Var stat re all nep a gomso.
En em sellet hac e tavo.

67. Diez ve da zen dievez.
Na ve surprenet aliez.
68. Pa vez den fur, pa vez coz den,
Na zispris james avis den.
69. Cals a c'houlenn da ampresta,
Ha ne c'houlennont quet renta.
70. Ret e caout art, urz ha musur,
Anéz beva d'an avantur.
71. N'en em servich, ha te entent,
Eus a vugale na querent;
Nac eus a zen recommandet,
Pe autramant e vi tromplet.
72. Ne quet difennet caout moyen,
Mæs ret e gout insign an den.
73. Matos nevez pa antreo,
Quement a teir a labouro.
Epad diou pe deir sizun
Quer couls hac hi ne deus nicun.
Mæs a c'hano da benn a bloas
E zai d'ar pas a parti c'hoas.
74. Guelloc'h ræson a gleo mevel
E pa vez cannet da sevell.
75. Den so ha n'en deus en e dy
Nemet sardinet da zibry,
Hac a facho en un ty all
Na ne gueff rost eleac'h quic sall.
76. En un desert eo guel beza,
Ha caout eno peoc'h da veva,
Evit ne deo chom assambles
Gant greg ebet mar de folles.

77. James boutaillat mat a vin
Ne ras trubuil da gabucin.

78. Reglen ur manac'h eo teana
Digant an oll hep rei netra.

79. Mignonach bras oc'h leanez
Mar goulen re, na ra james.

80. Rei d'ar beurien an aluzen
Ne ziminuas quet ar voyen.

81. Mont d'an oferen ha rei querc'h
Ne ra da zen chom varlerc'h.

82. Ne de quet fur nep a roi
Cuzul da zen da zimisi,
Nac ive da vont d'an arme,
Chansus an eil hac eguile.

83. An eol brillant dioc'h ar mintin,
Hac ur greg a barlant latin,
Hac ur buguel maguet gant guin,
A gustum oll ober goall fin.

84. Cuz da secret oc'h den mezo,
Rac anez an oll er gouezo.

85. Ne deus en un ty netra creoc'h
Evell union ha peoc'h.

86. Union a gresq an danvez,
Disunion er c'holl bemdez.

87. Furentez en accomodi
Pa vez procez oc'h goal parti.

88. Pinvidicat advocadet
A ya ra tut sot hac aheurtet.

89. Ur setanc vat ne dal james
Un accord fall en ur procez,

90. An drouc a so o chicannat,
Ha gant procez n'eus hini mat.

Eus a procez, pa ve dister,
A sao cant all gant an amser.

91. Den fur abars ober netra
A guemer musur da guenta.

92. Gant peoc'h eo guell dibri bevin
Evit poncinet gant chagrin.

93. Clasq ar peoc'h, bez patient,
Abar mervel bez penitant.

94. E peb affer goull cuzul vat
Mar fell dit caout iffu mat.

95. Evit gounit da brocez prest
Ro da barner present pe fest.

96. Un den en deus e necesser,
P'eus a dra en deus en affer.

97. Evit attrap louarn pe gat,
E renquer sevell mintin mat.

98. Mar fell da zen disqui squiant,
Arabat e ve feneant.

99. Mar oc'heus da ober un dra
Lez varc'hoas, gra en brema.

100. Un dra fall e chicannerez,
Hac a ruin cals a drez.

101. Nep gant arc'hant a c'hoario,
Ne dle quet conta varnezo.

102. Ur c'hoarier hac ur galant
En o c'hompsoù so inconstant;
Nep o c'houmero voar o le
A vezo tromplet bevez ve.

103. Mui a zrouc a ra tol teot
Evit na ra tol impiot.

104. Lemmoc'h e teot un drutel
Evit na de tremp ur gountell.

105. Mui a dut a laz ar guin
Evit na yac'ha medecin.

106. An douar a guz ar muntrevez
A rear-gant medecinerez.

107. Doue a gaç ar c'hlenvet quit,
Gant medecin eza ar profit.

108. Medecin so en deus ongant
Ha n'en deus nemeur a squiant.

109. Ne dal netra studia re
Hep caout sourçi eus e ene.

110. Mezur chaç ne de quet dlet
Da nep n'en deus nemeur a ed.

111. Ervez ar vrec'h toull ar voazenn,
Ervez ar bloas gra da soubenn.

112. Digentil rent ma n'en deus quet,
A ell efva guin avelet.

113. James den en devoa naon bras
Tam bara fall na rancontras.

114. N'ep deus ezom ar pinvidic
Eus a vara nac eus a guic,

Naon hepquen a zefot deza,
Ha d'ar paour e tefot bara.

115. Nep so custum da souffr ato,
Nebeut a dra er c'honsolo.

116. Pris cals a draou ne ouzer quet
Quen na renquer o divoeret.

117. Ty caër nep a vatisso
A gavo prest e yalc'h goullo.

118. Da dremen pont ha rivier cre,
Mevel araoc ha mestr adre.

119. Fazi en deus ha tromplet eo
Nep a gred tout ar pez a gleo.

120. N'en em vantet d'en ous e raç
Nac eus e aliançou bras;
Ur vezen gaër hac hi uhel
En deus yve branchou isell.

121. Ret e caout ur mignon fidel,
Adversour ebet mar gueller.

122. Cals mignonet e general,
Hac unan mat e special.

123. Guell e caout mignon er mez
Evit caout arc'hant leiz ar prez.

124. O re fiziout e meur a zen,
E teu mil malheur, mil anquen.

125. Adversour reconciliet
Hac ur mignon dissimulet,
Nep a fiz enno a dra sur,
So ret lavaret nequet fur.

126. E yaouanquis espern so dleet
Var benn ma tui cozni darret.

127. Ur vreg prudant dre a furnez
A so lustr bras d'e zieguez.

128. Nep a gar Doue gant parfeter
Er servich mat hep poan ebet.

129. Nep a gar Doue deiz ha nos
A gueff partout ar barados.

130. Beva, mervel so memes tra
Da nep a so Doue ganta.

131. Ur guir gristen so e zever
En em rei tout d'ar mat ober.

132. Adversite e ber amser
A rent habil pep scolaer.

133. Ar vuhez vat a bad ato,
Ar vuhez fall a finisso.

134. Nequet buhez hir, nac an oat
Eo a ra ar christen mat.

135. Ur vuhez ber cunduet mat
A dal mui cals ha mui e pad
Evit na dal buhez un den fall,
Pa vesse mil bloas ha mil all.

136. Na zesiromp quet beva pell,
Mes greomp erfat abars mervell.

137. Ur maro mat so da garout
Guell evit buhez an hira tout.

138. Pep tra a vanq d'ar vicius,
Neubeut a dra d'ar vertuzus.

139. Er memes sac'h ne antreas
James henor ha profit bras.

140. Dibaot e vez tieguerez
Plac'h dibarfet ha rederez.

141. Plac'h a receo a so livret,
Plac'h a ro so abandonnet.

142. Paourentez a dosta e cuz
Oc'h queguin lipous ha re druz.

143. Dibaot ar bardonnerien vras
Na zistro sent d'o zy, siouas!

144. Ne veler quet guin mat hep ly,
Nac ivez vertus hep avi.

145. Nep so contant a vara seac'h
A gaff da beuri e pep leac'h.

146. Ar greg, an arc'hant hac ar guin
O deus o mat hac o binin.

147. Dibaot ec'h ell beva contant
Ur vreg e deus priet mechant.

148. Ar vreg a c'hoars pa gar c'hoarzin,
Pa gar e vouel nos ha mintin.

149. Dibaot er bet-man e veler
Vertus bras e plac'h dibreder.

150. Ma ne guevez quet a gabon
Beo gant bara ha gant oignon.

151. Ne deus er bet den re contant
A feiz, a ræson, nac arc'hant.

152. Ar madou drouc acquisitet
Ne brospèront gant den er bet.

153. Faciloc'h eo plega planten
Evit na de plega guezén.

154. Sotoni bras e da un den
Abars mervell rei e voyen.

155. Ur c'hreg so custum da efva
A bep hent tout ne dal netra;

Oc'h peb honnestis e ser dor,
Hac ous peb pec'het e tigor.

156. Ne deus serpent dangerussoc'h,
León na dragon terriploc'h

Evit ur vreg so e coler,
Ous e facha so mil danger.

FIN.